

OLLIVIER N°647 B

cf. 750

GUERZ AR GARNEL

Demp d'ar Garnel, Christenien, güelomp ar Religou
 Eus hor breudeur, c'hoarezet, hou tadou ha mamou,
 Demeus hon amezeyen, hor brassa mignonet,
 Güelomp ar stat truezus e pini int rentet.

Güelet e reot aneze torret ba brozunet,
 Ha memes au därvvia a zo e poultrent :
 Ne veler mui o noblanc, o danvez, o guenet,
 Ar maro hac an douar o deus o distrujet.

Ar paour hac ar pinvidie, ar mestr hac ar sujet,
 Oll e zint rentet bénvel, oll dizenvelebet ;
 Ne zeus mui nemet esqern, poultre ha breinadurez,
 Dign eus a gompassion hac eus a bep truez.

Hoguen er stat truezus e peini int rentet,
 E parlantont e langach mud elocant meurbet
 Ous peb-unan a c'hanomp, mar qeromp profita
 Keit ma blijo gant Doue hon lezel er bed-mâ.

Clévit eta anezo, ha gril attention,
 Eo dezir da brofita eus a greis ho calon :
 Lavarat a rlo deoc'h e zin bet er bed-mâ.
 Hac e varvfot evlto pa sonjot nebeuta.

Ni zo bet var an douar o rën quer coulz hac'hout
 O parlant hac o vele, oc'h eva, o tébri,
 Hac ceto amâ bremâ ar stat ma zomp rentet,
 Goude m'omp bet en douaro o vezur ar préoved.

M'oа un den crén ha galant, ha me un dijentil,
 Me voa un den pinvidie, ha me un den habil ;
 Me meus collet va noblanc, ha me va oll danvez,
 Me va nerz ha va guenet, ha me va güizieguez.

N'hon eucavet er bed-mâ nemet hon œuvrou mad
 Da bresanti d'or Barner, d'hon Roue ha d'hon Tad ;
 List eta madou'u douar, detesti ar viçou,
 Hac ornit mad hoc'h ene a bep seurt vertuziou.

Mar goulennit diganemp pelec'h èt hon eneu,
 Ni respoito : d'ar purgator, rac hoanes è hor brô ;
 E maïnt en tân o tévi vit peor-baea o die
 Contractet var an douar da justic un Doue.

Eus e ouelet ar flammou ne cessont o crial,
 O choulen hor pedennou, ma ellint sortial
 Eus ar prisoniou teval e pere int tolet ;
 Hastit d'hor zicour, ha na zaleit qet.

Dêch-hu en em adresseomp, qerent a mignonet,
 Da gaouet memor arc'hanomp pa zit dre ar vêret. *
 Lavarit en eur dremen : Doue ra bardouno
 D'an anaon er purgator, rac ennes è hor brô.

Un aluzen, ur beden grêt gant devotion :
 Ur yon pe un oferen, pe ur gommunion,
 A ell catz hor soulajt ha berrât hor poaniou,
 Hac hon tenn en un instant a ouelet ar flammou.

C'houi, Béleyen charitabl en eus or c'bunduet,
 En hent hor zilvidiguez, pa edomp var ar bed,
 Cuntinuit c'hoas un nebeut da gaout trues ouzomp,
 Oc'h ober, dre drugare, œuvrou mad evidomp.

Ispicial o pedomp pa deuit da célébri
 An Oferen en ilis, élèvit neuze hor c'hi
 Eus a ouelet ar flammou o c'houlen diganeoc'h
 Ma teuot d'ober gant Doue dre'r Sacrific hor peoc'h.

Ha p'or bezo peur-baeet ar boan die et d'or pec'het,
 Ni hor bezo déc'h neuze digant Doue reget.
 Pedit, ni a rai ive ; en em sicouromp oll,
 Ennes vezoz ar voyen ne deuyo den da goll.

Evel an dour o vouga an tân-goall alumet,
 An tân eus ar purgator a vez ive mooguet
 Dre ar Sacrific sanctel offret var an Auter,
 Da c'houlen hon delivranc ouz Doue hor Zalver.

Pa zorti an eol squeudus a zindan ar goabren,
 Ar bed oll en un instant a receeo sclérijen :
 Ni a zortio ive sclér evel ar stered
 Eus ar poaniou a zouffromp dre'r Sacrific offret.

Adieu tadou ha mamou, bredeur ha c'hoarezet ;
 Adieu, querent, mignonnet ; adieu dec'h, tud ar bed ;
 Ni a ra bremâ déc'h hor c'himiad diveza ;
 Adieu déc'h : quen a vo en traouyen Josapha.

Roit ar repos éternel, va Jesus, va Autrou,
 D'an oll eneo fidel pere zo er flammou,
 Ebars en ho Parados, da veoli da james
 Assambles gant an oll Zent ha gant an oll Æles.

Piou ac'hanomp, va Doue ! n'en deveus divoeret
 Un tad, ur vam, urboguel, querent all, mignonet ?
 Bizirom-ta o beziou ha pedomp a galon :
 Un douçder an tenerra eo d'ar c'christen güirion.

Daoulinet var o beziou, e credomp fermament
 En ur bedi evito, int d'hor speret presant.
 Lavarom-pa evito, gant hor mam an Ilis,
 Ur Miserere mei hac un Deprofund's.

DOUE DA BARDONO D'AM ANAON !